

254

Bombardamant
Tanger ha Mogador,
Gant ar Pring a Joinvil,
ha Victor Isly,
Gounezet gant ar Marechal Bugeaud var ar Maroqinet.

(270, suite)

Var ton Potret Loquing.

Canomp, Breizis, gant joa guirion,
Eus a greiz hor c'halon,
Triumph ~~hob~~ armou
Var hon adversourien,
A bae o c'hrimou (271)
Evel guir draitourien.

Hac ar guder soumettet,
E parti qerqent
Da glask c'hoar gloar, enor
Ha prest en em rent
Dirac q'ar Mogador.

Impalaer ar Maroqinet,
Abder-Rahman hanvet,
Leun a draitourach
Enepr ar gristenien,
A deu gant arrach
D'attaq ar Francisien.

Ar Pring vaillant neuze ractal
A gommand ar signal :
Qerqent eur qurun
Obuzou, boulij
Ar fort a vrugun,
Na ell rezista mui.

Mes, hor Pring vaillant a Joinvil,
Harros meurbet habil,
Gant e escadren,
Hep ven ouz nep danger,
En em rent soudan
D'assieji Tanger.

A uz Mogador ne velet
Nemet eur bouill-moquet.
An t'ân en feulor
A zistruj, a ravach :
Eur spont, eun horror
Voa giclet ar c'harnach.

Ractal e laqa bombardi
Ar q'ar-ze enemi,
Hac hon c'hanonniou,
Carquet oll a vindraill,
A vrêv ar fortchou,
O distruj hac o draill.

Abd-er-Rahman, te, dey impi,
Zo caus d'an arvest cri ;
Te deu da c'hervel (272)
Varnoud ar maleurion ;
Eus eur seurt brezel
Eo victim da bobliou.

Diouc'h-tu m'en deus o fulluc'het, (272)

Ar Pring a voa atao placet
En pen e zoudardet,

Duz o excita,
Dre ar brassa vaillanç,
Da zont da flastra
Adversourien ar Franç.

Pavillon ar Franç gant enor
A flot van Mogador.
Hon adversourien
O deus anaveet
E zoamp trec'hourien,
Hac int en em rentet.

(274) Enor ha gloar ra vo rentet
D'hor Prinç, meurhet caret,
Pini n'em expos
Dre ar gourach vrassa,
Hep gemer repos,
D'an dangeriou goassa.

Ar Roue, vel em tad tener,
A scrif prest d'e Vab ger,
O tont d'er meuli,
Hac e oll eqipach
En em sacrifi
Dre ar brassa courach.

Evel tad mad ha quier gristen,
Ec'h adress e beden
Da Vestr an' envou
Da vea prezervet
En oll dangeriou
Ar Prinç e vab caret.

Ne gar get ar Maroqinet
int bet avoalc'h frottet:
Attaq' reont c'hoas
Hon arme a Alger;
Mes bras vo o gloas
Avars nebeut amzer.

(275) Dont a reont d'hoz attaqi

Er bleneç a Isly.
Daou-ugent mil den
O d'oa en o arme
Hon eiz mil heqen
Zo trec'hourien varne.

Ar Marechal Bugeaud neuze,
Er penn eus e arme,
Leun eus a gourach,
Equis quier Francisien,
A quier gant avrach
Var hon adversourien.

Chadenou a voa preparat
Gant ar Maroqinet,
Leun a arroganç,
D'erren ar Francisien,
Mes, daoust d'o bombanç,
Int dipennet soudan.

(276) Eur gourach ar vrassa meurhet
Vo a en hor zoudardet:
"Trec'het pe mervel"
Vo a o divis heqen;
Vel eur bar avel
Dre oll int trec'hourien.

Arme vras an' enemiet
A zo oll distrajat.
Nombr a zrapoyou,
A dantennou ive
Ha niver a draou
Zo dilezet gante.

Bataill Isly vo anavet
Dre bevar c'horn ar bed
Vel quier desteni
Eus ar brassa vaillanç
Var an' enemi
A rouantelez Franç

256

An Impalaer Abd-er-Rahman,
 O velet n'alle mann,
 En deus goulennet
 Ar peoc'h digant ar Franç,
 Hac eo accordet (277)
 Dre c'hrac ar Providanç.

Ar Roue en deves ractal
 Scrifet d'ar Marechal
 D'e drugarecat,
 Hac hon oll zoudardet
 Ma zint bet trec'h mat
 Var an enemiet.

Demeus an niver harroset
 Zo en em distinguet
 Er vataill vras-mâ,
 Etoez ar Francien,
 Ne harvin amân
 Nemet unnez hepken.

La Morcier, Bedeau, Guyon,
 Epivent, ha Courson,
 Cissez, Trochu,
 Ducrest, ha Martigni,
 Oll, potret dic'h-tu,
 Ar Beg, couz hac Hardy.

Gloar ive d'ec'h, soudardet mad, (278)
 Atao trec'h er gombat:
 Soutenit bepret
 Dre ho prassa vaillanç
 Enor ha respet

An drapo sacr a Franç.

Ar victor n'elle mancout deomp,
 Rac Doue voa ganeomp;
 E Vam beniquet,
 Carquet a vadelez,
 Atao a zo bet
 D'ar Franç Protectourez.

Drapouzon Tanager, Mogador,
 Testou eus hon enor,
 Re Isly ive,
 Digasset da Paris,
 Zo placet ere
 Vel d'hon triumph ar pris.

Canonniou an Invalidet
 O deves bet tennet (279)
 D'annonç ar c'helou
 D'ar Barisianet
 Pere o zeloue
 Gant eur joa vras meurbet.

Demeus a fouç hor c'halonou
 Rentomp hirio graçou
 D'hor Mestr souverain,
 Hon Tad, hon esperanç,
 A rent trec'hourien
 Soudardet vaillant Franç.

A. Lédan.

Bataill Isly e deves bet lec'h ar 14 eus a vis Eost; Bombardamant Mogador, ar 15, dez Gouel ar Verc'hez; hac e zzo en nozvez ar 14 d'an 15, entre an diou victor-ze, e deves ar Brinçes a Joinvil laget eur Brinçes yaouanc er bed.

An A. Prinç a Joinvil en deves eta souhetet eur Gouel mad d'ar Rouarez, e Vam, en e r feçon meurbet glorius.

An A. abat Coquerneau, chaloni enorus eus a Guemper, pehini a voa bet gant

(230) an A. Pring a Joinvil e Santez-Helena, o qerc'hat relegou Napoleon, en deus grêt sevel eur chapel, gant peb seurt pavillonou, hac an auter er c'hreiz, ouz traon guern vras lestr ar Sulfren, hac alumi oll fanaillo ar vatimant. Ar zoudarded a voa oll dindan an armou. An equipach en antier, reizet var ar pont, ha detachamantehou al lestri all eus an escadren.

Ar Pring, en e gaera uniform, evel en deiz ar gombat, hac e oll oficerien, a voa present. Al lestri n'en deo mui eur vatimant: euy templ eo consacret da Ioue. Ministr hor Falver misericordius a bign d'an auter, hac an oll a zo en euy brosternet en hano an Hini a zo en euy sacrificiet evit an oll.

Neuze an aumônier a gân eur zervich vras evit ar re o deus collet o buez evit o mam-brô.

Euy devotion an touchanta a rene eno: eur silanç vras a zalc'het: ne zoat occupet nemet da bedi evit hor breudeur maro er c'hamp a enor.

Impossible e ve rei da zantout an effet e deus product ar ceremoni zantel-ze, dreist oll er moment solemnel en pehini an equipach antier, an amiral, an oficerien, ar vartolodet ha zoudardet stouët dirac an Hosti sacrasavet gant ar béleg^{ts} uz an oll, epad ma voa ar zoudardet daoulinet, ma presentent an armou, ma teue sioulic ar goaguennou môr da sqêi ouz costezion al lestri, gant an drous eus an tambourinou o sqêi d'ar c'hamp; ze heppen a drouble majeste ar silanç vras a rene etouez an oll asistantet. Ar galon hep muiquen a ell comprey gementse, mes ar bluen na ell get dont d'e scrifa.

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 270-280:
gwerz, p. 270-279, strophes noy numérotées;
note de Lédan, p. 279-280.)